

EFEDOU AN BREZEL PEVARZEK

Pays	Mobilisés	Tués
	(en milliers)	
Russie	15 000	1 700
France	8 317	1 393
Royaume-Uni	6 000	776
Italie	5 615	530
États-Unis	3 800	114
Roumanie	1 000	158
Serbie	450	400
Australie	413	60
Belgique	380	44
Allemagne	13 000	1 950
Autriche-Hongrie	9 000	1 047
Turquie	2 850	400
Bulgarie	950	100

I. Efedoù demografel:

1. Pet milion a dud a zo marv e Frañs, e Alamagn?.....
2. Ar an diell 2: piv a vez reprezantet?.....
3. Penaos e veze anvet ar re c'hloazet ?.....




4. Diell 3: Petra a reprezant Al liv roz ha glas?.....

5. Diell 3: penaos e vez gwelet efedoù ar brezel ?

Pertes des principaux belligérants.

Diell 2 : tud c'hloazet

<http://www.gueules-cassees.asso.fr>



Diell 3: piramidenn an oadoù e Bro C'hall (1/01/1926)

II. Kemmoù àr an harzoù

Diell 4: feur-emglev Versailles get Orlando, Wilson, Clemenceau ha Lloyd George



Diell 5: elfennoù Feur-emglev Versailles 28/06/1919

- Rann 42,43: arabat eo da Alamagn mirout pe sevel difennoù àr ribl kleiz ar Rhin na àr ribl dehoù e kornôg ul linenn treset 50 km eus reter ar stêr.
- Rann 51: an tiriadoù roet da Alamagn e 1871 e vo roet en-dro da Frañs a-dal d'an 11/11/1918
- Rann 80,81,87: anavezout a ra Alamagn dieubidigezh ha harzoù Aostria, Tchekoslovakia ha Polonia.
- Rann 119: dilezel a ra Alamagn he galloud àr he zrevadennoù tramor.
- Rann 160: Ne C'hello ket arme Alamagn bout enni oc'hpenn 100 000 den.
- Rann 171: arabat eo sevel tankoù.
- Rann 173: ne vo ket a servij-soudard ken.
- Rann 198: ne vo ket a girri-nij en arme ken.
- Rann 231: anzav a ra Alamagn ez eo-hi ha he c'henvrezelourien kiriek eus an holl golloù hag eus an holl distrujoù gouzañvet get ar gouarnamant unanet, abalamour d'ar brezel int bet rediet da ren a-enep tagadenn Alamagn hag he c'henvrezelourien.
- Rann 232: goulenn groñs a ra ar gouarnamantoù unanet ha prometiñ a ra Alamagn ma vo adkempennet an holl distrujoù gouzañvet get poblañs ar Re-Unanet.

6. Diell 5: petra eo an tiriadoù sellet er rann 51?.....

7. Diell 5: Roit skouer da gastizoù milourel kemeret evit Frañs?.....

8. Diell 5-6: Perak ne c'helle ket Alamaned'zo degemer seurt feur-emglev lesanvet "diktat" (diviz-ret)?.....

Diell 6: feur-emglev Versailles barnet get un Alaman:

"Biskoazh n'eo ket bet ur bobl rediet da blegiñ d'ur peoc'h ken mantrus ha ken mezhus get kement a feulster... Ur peoc'h hep rakdiviz, ur peoc'h dre ret èl hini Versailles a zo koulz hag un torfedour é teurel ur paour-kaezh reuzeudik d'an douar hag é rediñ anezhañ da roiñ e yac'h.

Von Bullow, Eñvorennoù, 1931

Diazezet e oa an holl emglevioù-se diàr **roll-mennadoù Wilson(14)**, Prezidant ar Stadoù Unanet, é klask doujiñ d'ar broadelouriezhioù e voe savet harzoù nevez: Polonia, Tchekoslovakia, Slaviz ar C'hreisteiz strobet get Serbia a grouas ur Stad nevez, Yougoslavia anezhi.

Krouidigezh Kevredigezh ar Broadoù, SDN, dezhi ar pal ingaliñ an disemglevioù etre ar Stadoù.

9. Diell 7: lakait àr ar gartenn anvioù ar morioù ha keñveriit get ar gartenn e 1914 en ur lakaat anvioù ar Stadoù nevez krouet e 1920.

8. Petra eo ar Stadoù nevez?.....

